



Prezegenn war ar Maen Log

15 a viz Gouere 2012



Hebarc'h dileuridi a Gembre, a Gerne Veur, Breudeur ha C'hoarezed, mignoned ha mignonezed. degemer mat d'an holl war an dachenn-mañ en deiz a hiziv. Fellout a rafe din da gentañ iskuziñ an Intron Lena Louarn, Is-prezidantez Kuzul Rannvro Breizh he deus kemennet deomp ne c'helle ket bezañ hiziv ganeomp-ni, dalc'het m'eo en ul lec'h-all gant dleadoù he c'harg.

Saludiñ a garfen ivez unan ha n'emañ ket amañ ha e vo kaoz anezhañ ganin : Prezidant kozh Rannvro Breizh an hini eo, an aotrou Yann Erwan An Drian m'eo bet anzavet koulskoude an dellezoù anezhañ gant pennoù bras nevez Bro-C'hall pa'z eo bet anvet da vinistr nevez'zo. Keuz am eus un tamm evit Breizh, pa laran deoc'h, rak evit ar wech kentañ e istor ensavadurioù ar rannvro, o deus kalz a Vretoned, me en o mesk da vihanñ, santet e oa unan a benn ar fin o sturiañ ar vag. Hetiñ a ran a vouezh uhel e chomo bepred ur Breizhad gwirion, un den a spered digor hag a gendalc'ho da stourm evit e vro c'hinidig. Chañs vat dezhañ en e garg nevez ha chañs vat ivez d'an aotrou Pierrick Massiot, ar Prezidant nevez na c'hell ket bezañ ganeomp hiziv. Digarezet eo eveljust.

Plijadur non eus ivez o tegemer hiziv ivez, paotred ha merc'hed o plantañ tan, startijenn hag imor vat e bed ar sonerezh e Breizh. Eus ar Skarzherien Peulvanoù a fell din komz. Tro hor bo da gontañ kaoz asamblez da welet hag-eñ e c'hellomp reiñ muioc'h a don c'hoazh d'an hengoun. Degemer mat, tudoù ha bec'h dei !

Ur bloavezh heverk eo hemañ.

Heverk da gentañ pa 'z eus bet ur cheñchamant e penn republik Bro C'hall. Ne sell ket kement se war eeun ouzh ar C'hoursez rak ne savomp ket a-du gant un tu pe egile. N'omp ket ur strollad politikel ha ne aliomp den ebet war an dachenn-se.

Memes tra e c'heller merzout ur fed hag a dalvez ar boan bezañ meneget.

Pa 'z eo deut e Kemper François Hollande, paotr ar Strollad Sokialour, etre an div droad da zilenn ar Prezidant, en-deus hemañ embannet penaos en doa graet e gonchoù ha ma oa degouezhet er penn kentañ d'ar redadeg e oa a drugarez d'ar Vretoned. An hevelep prederi eveljust a c'hell bezañ lakaet war wel gant pep hini diwar benn an eil troad pa z'eo aet da vat François Hollande e barzh.

Un dra'zo sur, tudoù : an hini a zo bet skarzhet warlerc'h bezañ graet fae e meur a geñver war ar Vretoned epad pemp bloaz, n'ouzomp ket atav en deiz a hiziv abalamour da betra, hennezh a zo bet digaset dezhañ an dorzh d'ar ger ganto en un doare splann, net ha pizh, krak ha krenn ! Dav vo neuze d'ar bolitikourien prederiañ meur a wech araok lañgachat hor bobl, ma fell dezho bezañ dilennet d'an nebeutañ !

Gortoz a ra bremañ ar C'hoursez evel ar Vretoned ma vo dalc'het d'e her gant ar Prezidant nevez, d.l.e ma vo kadarnaet Karta ar Yezhoù-Rannvro ha kaset da benn un abadenn digreizennañ ouzhpenn gant galloudoù pouezusoc'h roet d'ar Rannvroioù da geñver ar foñsañ-arc'hant d'an embregerezhioù, an tailhoù-lec'h ha kiriegezh nevez war an dachenn se. Da ziwall 'zo eveljust. Michañs ne vo ket Yann pell diouzh e gazez !

P'emaomp ganti hon eus ni gwelet gant plijadur ar strolladoù politikel nemet hini Marine Le Pen, o plantañ bruzunadoù brezhoneg en o follennoù-brudañ zoken mignoned Jean-Luc Mélenchon.

Hennezh a ra ur sektenn eus ar skolioù Diwan hag a embann n'eus ket ur yezh wirion eus ar brezhoneg nemet peder rannyezh ha n'ouzon ket c'hoazh peseurt randonerezh !

E vignoned, brezhonegerien a faeson en o zouez, m'o defe c'hoant rastellat muioc'h a vouezhioù du-mañ e vo start dezho, en desped d'o bolontez vat, desachañ ar begou lipous gant seurt pouloudennoù en o zoaz-krampoezh politikel. Daoust ha klevet e vint a benn ar fin gant o rener muiañ karet ?

Ur bloavezh heverk ez eo bet ivez a drugarez d'ar Redadeg 2012 evit ar Brezhoneg. Berzh he deus graet an darvoudenn hag izili ar C'hoursez o deus kemeret perzh evel boas.

Ur bloavezh heverk eo c'hoazh dre m'he deus ar C'hoursez skoulmet liammoù da geñver Gouel Erwan gant tud ar gwin e Breizh. Tud a galon, Bretoned lorc'hus hag emichañs e c'hellimp kenlabourat evit mat hor bro.

Ur bloavezh heverk ivez evidomp-ni atav dre ma 'z eus bet sevenet un dezenn gant ur studier e Skol Veur Brest a zivout Gwenc'hlan ar Skoezeg, hor pempved Drouiz Meur ha kement en deus eñ degaset d'an Drouiziezh, d'ar C'hoursez ha da Vreizh. Un notenn dreist en deus bet an Aotrou Gregory Moigne digant e gelennerien evit e labour sirius hag a ziskouezh un dra a bouez evidomp-ni : un danvez dellezek eo ar C'hoursez eus ul labour skiantel, skolveuriek.

Anaoudegezh vat ivez e keñver labour Gwenc'hlan evit e vro hag an hengoun anezhi. Gant lorc'h e saludomp ar sal nevez a vo digoret e Kreizenn an Enklaskoù Breizhek ha Keltiek e Skol Veur Brest. Eno e vo kavet levraoueg Gwenc'hlan hag an holl deñzorioù legadet gant e wreg Bernadette Le Huche-Ar Skoezeg. Bez'e c'hello neuze an holl mont dezho ha tennañ o mad anezho. Me zo sur eo gwenn e ved gant Gwenc'hlan o welout kement se.

Neventi vat d'ar Vretoned !

Ra chomoc'h holl yac'h ha prest da vont waraok !

Bevet hor Goursezoù !

Bevet Keltia !

Bevet Breizh !